



Brezhoneg er gêr !

Penaos em boa desket brezhoneg da vat, 'mit-hu ?

Abaoe ma oa ur paotr yaouank ac'hanon e stourmen evit Breizh.

Abaoe m'am boa komprenet penaos e oa bet gwasket va bro, va fobl, va yezh.
"Brezhoneg Yezh ar Vezh" ! Ret mat e oa din labourat a-zevri evit dieubiñ Pobl Vreizh.

War ar maez e oan bet savet. Un tammig brezhoneg a ouien. Ne vijen ket bet gwerzhet.
Ne oan ket gouest da zistripañ avat. Va zud ne gomzent ket brezhoneg er gêr,
panevet pa ne felle ket dezho bezañ komprenet gant o bugale.
Evito n'oa mat ar Brezhoneg nemet da guzhat an traoù.

Stourm a raen hep ehan e Skol an Emsav, en U.D.B., en F.L.B., e Stourm ar brezhoneg...

En Aïta e vefen bet aet zoken panevet e oan bet kavet re gozh !

Kroget am boa da zeskiñ brezhoneg zoken.

Kentelioù-noz, Stajoù Hañv, Skol-dre-lizher... "Hep brezhoneg Breizh ebet !"

N'oa ket bet padet pell ganin avat. A-vec'h kroget, kerkent diskroget !

E gwirionez n'em boa ket amzer. Kemend-all a labour a oa evit stourm evit Breizh,
ar Vonreizh, Brezhoneg Yezh Ofisiel, Breizh ar pemp departamant,
Ya d'ar brezhoneg, ar Brezhoneg er skol !

Neuze e oan bet dimezet. Gant ur stourmerez ivez. Unan start zoken.

Klasket he doa deskiñ brezhoneg, hi ivez. A-vec'h kroget, kerkent diskroget !

E gwirionez n'he doa ket amzer kennebeut. Kemend-all a labour a oa evit stourm
evit Breizh, ar Vonreizh, Brezhoneg yezh ofisiel, ar brezhoneg er skol !

Ha galleg bras ganeomp er gêr !

Bugale hon doa bet, div blac'hig, ur paotrig.

"Hor bugale, yañtao, ne vint ket ken sot ha ni !" Ha yao, d'ar skol Diwan.

Eno e vefe desket brezhoneg dezho !

Ha ni, dao da stourm evit Breizh, ar Vonreizh, Brezhoneg yezh ofisiel, Breizh ar pemp
departamant, Ya d'ar brezhoneg, ar Brezhoneg er skol... Nag a lorc'h a oa ennomp
gant hor bugale er gouelioù brezhonek, Rouzig ha Louarnig, Peskig Ebrel, Gouel ar c'hezeg,
Kastell 'Lys, tro Menez Arre, ar Redadeg... Pegen brav e teue ar brezhoneg ganto !
Pegen mat e teskent er skol. Hor merc'h koshañ veze atav da gentañ en he c'hlas.

Un drovezh hor boa pedet an amezeien gant o lein. Brezhonegerien eus ar vro anezho,
brezhonegerien vat zoken. Kement ha lakaat anezho da gomz brezhoneg ouzh hor bugale.

Hag evit diskouez dezho pegen barrek oa ar re vihan war ar yezh.

Hag ar re-mañ da zispakañ dirazo ar c'haieroù jedoniezh, mentoniezh, skiantouriezh,
istorouriezh ha me oar peseurt "iezh" all c'hoazh.

Ken oa chomet sebezet-marv an amezeien dirak ken bras deskadurezh.

Pa grogont da gomz brezhoneg gant ar vugale avat e voe un abadenn all.
An amzer, traoù an ti, ar boued, hag an dra-mañ-tra hag an dra-mañ-tra-hont...

Ha penaos ha petra ha perak... Ar vugale a chomas boud.

Ne oant ket gouest da gompren ar re vras.

Ar re-mañ n'o c'homprenent ket kennebeut. Ranket mont war ar galleg.

Goude ar pred e oamp aet asambles da bourmen er-maez. Ha me klask lakaat anezho
da gomz brezhoneg kenetrezo adarre. Al liorz, al legumaj, ar bleunioù, al loened,
ar chatal, an aod, ar mor... Boud adarre. Ha bec'h d'ar galleg ! Gant ar vezh !

Antronoz vintin hor boa lakaet, va gwreg ha me, hon anv evit mont da
zeskiñ brezhoneg. Ha poaniañ da zeskiñ. N'hor boa ket amzer ken da stourm
evit Breizh, ar Vonreizh, Brezhoneg yezh ofisiel, Breizh ar pemp departamant,
Ya d'ar brezhoneg, ar Brezhoneg er skol.

Dizale avat e oamp gouest da gomz brezhoneg kenetrezomp,
ha gant hor bugale ha gant an amezeien ivez.

Bremañ 'vat em bez amzer adarre da vont da stourm evit Breizh, ar Vonreizh,
Brezhoneg yezh ofisiel, Breizh ar pemp departamant,
Ya d'ar brezhoneg, ar Brezhoneg er skol...

Ha dreist pep tra AR BREZHONEG ER GÊR, na petra 'ta !

Ur stourmer deuet da vezañ brezhoneger.

Goulc'han Kervella

Miz Ebrel 2010